



Kenurzhiezh Sevenadurel Kevredigezhioù Breizh
Parmenerie des Souétes Qhulturales de Bertegn
Coordination Culturelle Associative de Bretagne

6 plasenn Gwiriou Mab-Den • place des Droits de l'Homme – Ti ar Vro – 29270 KARAEZ-PLOUGËR • CARHAIX-PLOUGUER
SIRET 519740088 00025 | (+33) 02.98.73.20.58 | kevrebreizh@kevrebreizh.bzh
www.kevrebreizh.bzh | www.twitter.com/KevreBreizh | www.facebook.com/kevrebreizh

Kevre Breizh oc'h harpañ skolañoù Diwan hag an tolpadeg e Brest Disadorn da 1 eur 30 d'enderv evit enebañ ouzh diskar dic'houzañvus an eurioù brezhoneg gant an Deskadurezh stad.

Kevre Breizh, kenaozadur kevredigezhioù sevenadurel Breizh, a zegas e harp diharzh da c'houlenn kelennerien, sindikajoù CGT ha CFDT, skolajidi ha tud skolañoù Diwan hag ar Rouedad Diwan evit ma vo dalc'het 3 eurvezh brezhoneg ar sizhun dre glasad ha n'eo ket dre live. Reiñ an eurvezhioù dre live pa vez meur a glas er memes live n'eo nemet skarzhañ eurvezhioù ha postoù labour. Diwan a vez taget hiriv, warc'hoazh e vo skolañoù publik pe gatolik.

Tagañ ar brezhoneg e skolañoù Diwan a gav e blas e politikerezh hollek an Deskadurezh Stad a-enep ar yezhoù rannvro, daoust da zinac'hadennoù digredus ar ministr, peurgetket dre adreizh al lise hag ar vachelouriezh e welomp e efedoù drastus gant digresk trumm niver ar skolidi en opsion « yezh rannvro » e kement akademiezh a zo abaoe 2018.

Gwelet a reer ivez enebiezh ar ministr Blanquer ouzh mennadoù kinnig lezenn Paul Molac evit ar yezhoù rannvro a fed deskadurezh. Ar mennadoù skarzhet a zo bet lakaet en-dro gant un niver bras a vouezhioù er Sened, ha goulenn a ra groñs ar c'hevredigezhioù yezh ha sevenadur ma vezint dalc'het, en ur chom evezhiek kenañ war emzalc'h ar ministr Blanquer ha vot pe get ar gannad-ez-ed er Vodadenn vroadel an 8 a viz Ebrel da zont.

Kevre Breizh soutient les collèges Diwan et le rassemblement à Brest samedi à 13 heures 30 contre la suppression inacceptable des heures de breton par l'Éducation nationale.

Kevre Breizh, coordination des associations culturelles bretonnes, apporte son plein soutien à la demande des enseignants et de leurs syndicats CGT et CFDT, aux élèves et parents des collèges Diwan et du réseau Diwan, pour le maintien des 3 heures d'enseignement hebdomadaire de breton par classe et non par niveau. Accorder ces heures par niveau quand il y a plusieurs classes de même niveau, c'est supprimer des heures et même des postes. Si Diwan est atteint, demain cela pourra être les collèges publics ou catholiques.

Cette attaque contre le breton dans les collèges Diwan s'inscrit dans une politique plus générale du ministre de l'Éducation nationale contre les langues régionales, contrairement à ce qu'il affirme avec un aplomb surprenant, notamment par la réforme du lycée et du baccalauréat dont les effets désastreux provoquent une chute des élèves en option langue régionale dans toutes les académies de France depuis 2018.

Cette politique se manifeste aussi par l'opposition du ministre Blanquer aux dispositions de la proposition de loi de Paul Molac pour les langues régionales concernant l'éducation. Les dispositions supprimées ayant été rétablies par le Sénat à une très forte majorité, les associations linguistiques et culturelles exigent leur maintien et seront très vigilantes sur l'attitude du ministre Blanquer et le vote ou le non-vote de nos député-e-s à l'Assemblée nationale le 8 avril prochain.